

# CHANSON

## POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontreo*

M'am bije speret da gompren, evel a meus fantazi,  
Me a vije n'en impliet da zonet da gomposi  
Eure'himiad leun a c'hlac'har, gret da gonscrivet yaouanq  
O deus tennet ar billet ebars er blaves brezant.

Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, bemp a vis guengolo  
Ezeo digueet adare eus a baros Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an derrupla :  
Blac'haret eo oll ligna p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quen nemet pevar ;  
Arvoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Meledar,  
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant :  
Pevar den eus ar re vrava, corfou e'er barud vaillant

Arvoanic Jacob a lare en deiz ze d'he gamarad :  
Eman a zo eun devez trist hac a ra din calonad !  
Guelet ma mam baour o vouela, ha va zad qes desolet  
Ha c'halonie ebars em c'hreiz so dija casi rannet.

Alz a sonchfe de, marteze penos e vent eur poultron  
Eun be aoun rac eun ten fuzul ! pe rac eur voulet canon  
Otramant zoun rac ar fatiq o vale ore an hentehou,  
Pe gousquet var eur guelet can ebars er c'hordegardou.

Dougen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,  
Bale bemde a guer dargner dre a fanq hac vouillen  
Ha goude e fin va beac'h rencout marteze campi,  
Pe gousquet var an douar ien pe otramant biouaqi.

Toro deus an nepa sonchse : mac'haljent leun em c'halon  
Evit guelet va bolonte ha va inclination,  
Ma na fotfe nemet va goad, me en seuilfe tout joaüs  
Eit souten hon Impalaër, eun tad quer carantezus !

Hou na gombatte quiet gant eur Impalaër christen ;  
Eur gaus quer just hag e hini zo facil da zouten,  
Ha somp mempreu da Jesus Ghrist, soudardet an Aviel  
Bugale da Zoue au Tad, tamplou da Speret-Santel.

Arça eta, camaradet quen quitaad euz or chontre  
Demp ni da ilis Plouillau da supplia hon Doue  
D'hor preservi demeus goal chans pa vezimp en armeou  
Ha da gonsoli bars er guer hon tadou hag hon mamou.

Adieu dec'h, Autre Sant Millau, patron euz ar barous-ma  
Adieu querent ha mignonet cessit breman da vouela  
Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hanomp,  
Hachou Ael mad d'hon chondua partoutelec'hou a zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme o tad desolet ;  
Piou a gonsolo oa dud paour goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cozni, me vo clevet o laret :  
Ma vije ma mab quez er guer en dije va soulaget.

Clevit ar vam o kimiad ive digant he buguel :  
Deus a na c'hoas ma boqin eur vech quent eguent mervel  
Aben ma retourni dar guer me vo ed euz ar beb-ma,  
Deus amañ etre va divrec'h evit ar vœch diveza.

A guichenen ar momet fatal ma c'heus lennet d'ar billet  
Beb noz vel ma fo di cousquet me a seblant da velet  
O tont eus eur gombat sanglant var eur chariot blesset,  
Pe tolet en eur hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc contristet c'hoas quen eguet partia  
Evit essato c'honsoli a lavar en eur vouela :  
Tavit va zad ha va vam baour, ha bevit en esperans,  
Doue, tad ar visericord, a zo bras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gras Doue hag ar Verc'hez, e vezo fin do glahar,  
Evit merq eus hon vaillantis, gant lore deus hon tocou  
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taélou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitant  
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha querent ha mignonet,  
Ha ma na mempret ar bonheur er bet ma' nem velet  
Gras deomp ebats er Barados assembles d'ad em gavet.

*Tous droits réservés :*

GUILLERMIC.